



Pa oan var bont an Naonet


♩ = 112 environ.



Pa oan var bont an Nao-net, ge! Pa oan var bont an



Nao-net, 'C'h o-ber va four-me-nad, Lam tou di-ri, lam



gan-thi 'ta, 'C'h o-ber va four-me-nad, E - on far-la-ri - dai-ne.

II

Me rencontr' eur vergelen, ge! (1)
Me rencontr' eur vergelen,
Var ar pont o ouela
Lam tou diri lam gant-hi 'ta
Var ar pont o ouela
Eon farlaridaine.

III

Va goalen aour, emezhi ge!
Va goalen aour, emezhi.
'Zo kouet er mor ama.

IV

Pegement rofet d'in-me ge!
Pegement rofet d'in-me,
Me ielo d'hi zapa.

V

Hanter kant skoed, emezhi ge!
Hanter kant skoed, emezhi
'Zo gavin 'm bours ama.

VI

Na d'ar c'henta plonjaden ge!
Na d'ar c'henta plonjaden,
Netra guellet en oa.

VII

'Vit an eilved plonjaden ge!
'Vit an eilved plonjaden,
Goalen touchet en oa.

VIII

'Vit an trede plonjaden ge!
'Vit an trede plonjaden,
Ar paotr beuzet e oa.

IX

He dad a oa er prenestr, ge!
He dad a oa er prenestr,
A ziroll da ouela.

X

Tri mab em euz-me ganet, ge!
Tri mab em euz-me ganet,
O zri ez int beuzet.

XI

E bered sakr an Dreinded, ge!
E bered sakr an Dreinded.
O zri e vint beziet.

(1) Vergelen = bergère.